

*Acheté à Plouescat, le jeudi 31 août 1865,  
jour de la Bénédiction de l'Eglise de cette localité.*



# ILIZ NEVEZ PLOUESCAT

*fol 89.  
m*

CONSACRET

**GANT AN AOTROU SERGENT,**

**ESCOF QUIMPER,**

**AN 31 A VIZ EOST 1865.**



Meulomp Doue, gant levenez,  
Dleour omp oll d'he vadelez ;  
Meulomp ive Plouescadis,  
Enor dezho, great ho ilis !

O Breiz-Izel ! an oll er goar,  
Er bed da feiz a zo da c'hloar,  
Eun deiz, en Env, da wir greden  
A vo ive da gurunen.

Ar Vreizidi dên ne gano,  
Plouescadis hep na veulo ;  
Pet bro, siouaz ! a goll ho feiz,  
E Plouescat, e cresp hep deiz.

Doue bepret madelezus  
A rent ho bro meurbet edus,  
Dezho ar mor, en he gounnar,  
A ro bizin, 'vit ho douar.

Savit buhan tour an ilis ,  
Neuze 'clevoc'h , Plouescadis ,  
Beteg ar mor hac he reïer ,  
Ar zoun skiltrus euz ho kleïer.

Tour he ilis d'eul labourer  
D'euz feiz he vro 'zo ar bannier ;  
Evit ma vo guelet a bell  
Ar bannier-ze savet huel.

Bennoz , bennoz , Plouescadis ,  
Da veza great ken caër ilis ;  
Digollet viot , bras ha bihan ,  
Doue 'ro mil evit unan.

Bennoz brema , ha greïz kalon ,  
D'ar veleïen , d'an daou berson ;  
Poanniet ho d'euz gant oc'h ilis ,  
Sonjit enno , Plouescadis.

Bennoz ive , broïz , bennoz  
D'an hini 'zo er baradoz ;  
He hano 'zo ê pep guinou ,  
He garantez , er c'halonou.

DÉPOSÉ :

J. H.

Var an Tour, pa vo êchu,  
 Sellit neuze a bep tu :  
 Ho lagad a vo joaüs  
 O contempli Mam Jesus.

Rac eno e vo placet  
 Imach e Vam beniguet :  
 He galloud a zistroyo  
 Ar maleur divar ar vrô.

Beniguet ra vo an heur  
 M'hor bezo oll ar boneur  
 Da velet Tour Sant-Martin  
 Peur-achuet alafin.

Deomp c'hoas a galon vad  
 Da gass eun offranc benac,  
 Evit m'hor bo oll ar joa  
 D'er güelet cren en e za.

*Meurs 1853.*

